

Louis PAGE (Kernouès :26 février 1871 - 2 décembre
1952)

"Pardon, Marie-Yvonne Corre

"Quand je pourrai je le ferai encore"

=====

Francine Inizan

vers 1886

1

Petra Francine Inizan
Ha nijet oc'h d'an Env
Assamblez gant an Elez
Da Varadoz Doue ?
Ar zonj am eus ac'hanc'h
Zo atao em sperd
Ha n'am c'huitaño biken
Keit ha ma vin er bed.

5

Ar paour n'ho kweloc mui
Pa zeï da di ho tad
O rei d'ezan aluzenn,
Gant eun ear douz ha mad.
Ne velo mui ho pizaj
Laouenn ha grasiuz.
Kement-se vo evitan
eun envor ankeniuz.

2

Ille eo ar c'hurust bihan
A iliz Kernouez
O peus kleved o kana
Gwechall ken aliez
O peus gweled daoulined
Eharz an aoter vraez
Oc'h assista ar leleg
E mysteriou ar Groaz.

6

C'houi eo gloar ho parrez
Hag henor Kergunic
Dre ho puez exempluz
Hag ho feiz birvidic .
Ar gwez a gavan tristoc'h
Endio d'ho maner koz ,
Ha seblantout a reont d'inn
E tougont kaony d'eoc'h.

3

Dalc'ed am eus ar gouloù
Vit o kommunia,
Ha lenned var o pisac'h
eun ear euz an nopla
Eun ear a zevosion
Hac a humilité
A garantez teneruz
E kenver an Aotrou Doue.

7

An avel huanaduz
A c'houeze n'ho brankou
A ra d'ezo hirvoudi
Ha murmuri klemmou
Ha dñe langaj an natur
Lavaront kement man :
"Peleac'h eman Francinic
Hor mignoneuz vihan".

4

Gweled am eus an daelou
C'kouenza d'en douar
Hag evel perlezenrou
E verkent o klac'hac.
Daoust da ze ho muzellou
A vousc'hoatze atao
Ils tremm a jome laouenn
En gespet d'ho poaniou.

8

Allaz ! Francine Inizan
Ne vez o mui gweled
En disheol d'ar gwez huel
Eleac'h ma oue ganed
Ne ma mui à Kernouez
Merc'h vihan de Kersauzon;
Met e hano "zo skrived
Ebarz meur a galon !

(Louis Page -suite) Francine Inizan (suite)

9

Allaz ! Peb tra er bed man
A jench e berr amzer,
~~X~~ Hag ar bokedou kaera
Peurvuia a veler
A greiz ma vint o lintra
En holl sked uez o gloar
Torred diwar o brankou,
Trouc'het diwar o gar.

10

Met ar bokedou divin
A zo eharz ar groaz
Arrozed gant gwad Jezuz
Saved er poaniou braz
Ar re-ze a jomm skeduz
Hed an eternite
En desped da Lucifer
Ha d'e holl zroug Elez.

11

Pa zeï ar c'hurst bihan
Etrezeg ar mor braz
~~X~~ Ha pa vez e unan
E c'huanado c'hoaz.
Moned a reï da bedi
War bez e vignounez
Hag e skuillo warnezan
Daelou a garantez.
=====

An Daou Varz Composée en

=====

Potred Lesneven

~~X~~

1

Ni potred Lesneven-zo gae ha dizoursi(bis)
A gar ar c'hanaouennou -Kement haq ar c'hoari

Diskan Ni ia endro-dizoursi braz ha dinec'h (bis)
Ni ia endro dizoursi braz
Ni ia endro dizoursi braz ha dinec'h atao.

2- Ma n'om ket potred krenv-Bolonfez vad a zo (bis) !
D'an neb a jom adrenv.. Ni lavar "deuz atac".

3- Ni gar ar brezoneg- ~~A~~ brezoneg Leon (bis)
A gomz anezan c'houeg - Hep an disterra aoun.

4- Ar groaz en hor gwered -Ha war beg hon touriou (bis)
Hor feiz zo grichennied- Start en hor c'halonou !

5- Mar goulennom sikour - Ni a vo sikoured (bis)
Ia mar plij hon labour - D'an hini ren ar bed.

Page-suite)

Yann ar Roudoushir. 1902

1 - Me eo Yann ar Roudoushir -En eus krabanou 'vel an dir

Diskan: Zim;Zim;Boum d'en em ganna (bis)

Zim;Biem;Baou ,d'en em ganna 'za !

X

2- Hennez ar mab a "gorn a zeac'h"-Ne javaz e vestr e neb leac'h .

3- Pemp kant lur a zougenn war e geïn-Ha bale ganto hep tam jeïn.

4- Ma teufe Combès da Lesneven - Yann dapfe krog en e jupenn.

5- Start eo hor c'halon en hor c'hreïz- Startoc'h hor groaz en hor Beïz

6- Euz an Nañned beteg Kastell - War zao,War zao,tud Breiz-Izel !

=====

"lère refrain de "Bro Goz"

- 1- Sao Breiz-Izel, en eac'h da vanielou-Rusied gant gwad hor c'hentadou !
Stagom d'hor gouriz hor c'hlezeïer hir -Ra vo hor c'halonou 'vel an dir
Reïz-Var zao! var zao! da gana bouez penn-Breiz da virviken,Breiz da virviken!
- 2- Bretoned,savom hor c'halonou-Ha touom e talc'him mad atao
Da vale war roudou hon tadou- Keït ma zeï ar bed endro.

=====

Ar Falc'herien

Refrain: O ia da,kanon gant joa - Eur ganaouen d'ar falc'herien !

- 1- Va zelennig,chenchom a don (bis) -Lezom hor gwelvan,hor c'haon !
- 2- Ar falc'her paour a zab mintin -(bis)- Abred e za gant e ribin !
- 3- Aliez kerkent diou pe teir heur (bis)- Aman war zao,ar c'heaz falc'her !
- 4- E bater neuze a lavar(bis)- Ne vez ket hir ,an holl er goar .
- 5- Mont 'ra d'an hent (bis)- Drant ha seder(bis)-Rag eur paotr krenv eo ar fal
c'her
- 6- Gant e vorzol,hag e anve (bis)- Me gred en eus eun tam fougeé .
- 7- Va mean zo mad,va falc'h zo lemm (bis)- Ne m'a ket ar c'hall war e zremm.
- 8- Assa,potred,holl 'm'aom aman (bis)- Piou vo hirio d'an diweza ?
- 9- Abarz staga ar c'hapiten (bis)- A denn e dog,'ra eur bedenn.
- 10-Goude 'tap krog er mean lemma (bis)- An holl botred 'ra eveld'an .
- 11- Setu 'n holl filchier o sini (bis)- Assa,potred,koulz eo kregi !
- 12- Er foennoc ne vez mui klevet (bis)- Met trouz ar filchier o redet .
- 13- Pa vez an deiz o c'houlaoui (bis) - Ar falc'herien zo a zevri .
- 14- Eur blijadur eo o gwelet (bis) - Pa vezont war gorf o rochet .
- 15-O falc'h a ra eun hanter-tro (bis)- Ar foenn a strinkont diouto.
- 16- Ar streo a zoa evel kaëou (bis)- Ar botred 'zo ruz o fennou .
- 17- Rag war ar gliz,eo peurvuia (bis) - E klask an holl en em essa.
- 18- An dour a red 'teïd an elgez (bis)- Met chom adrenv:biken jamez!
- 19- Hardi,potred,chachom atao (bis) - D'ar foennoc vraz,greom e baro .

- Erru Marjan gant dijuni (bis)- Leaz ar joadell a zo ganthi .
 - Al loïou beuz a c'hoari mad (bis)- Buhan eo rinset ar bodezad;
 22- Goudeze 'krogont adarre(bis) èmont a reont yud eteït ar strenv.
 23- Evelse 'tremen an dervez (bis)- E kreiz al labour hag ar prez.
 24- Gourvez a ra ar c'heaz falc'her (bis)- E gorf brevet gant ar skuizder.
 25- Ankounac'at a ra e boan (bis) - O trebi kig ha farz d'he goan .
 26- Eürus an den o labourat (bis)- Pen'eus feiz ha bolontez vat.
 27- Da Zoue e kinnig e boaniou (bis)- E c'houezen hag e labouriou .
 28- Er Baradoz e tiskuizo (bis)- Eur gurunen en eus enho .
-

Ar Paour hag ar PinvidigAr Paour

Salud d'eoc'h bourc'hiz yaou-
 Gant henor ha ~~gant~~ respect
 Me a c'houlen humblamant
 Ma vim camaraded.
 Allaz, me n'em eus netra
 Nag arc'hant, nag aour,
 Hag hanvet oun dre aman
 Julian, Mab ar paour .
 = = = =

Ho ia zur, me n'em denno
 Pa deuit d'em repui;
 Met araog partial e karfen resouni
 Rag petra eo ar sujet
 Demeus ar proposiou
 A glevan breman soudan
 O tont euz o kinou ?
 = = = = = =
 Ma ne meus ket a dalant
 Evel m'ho peus c'hui
 Nag proposiou a zrouglanz
 Evit oc'h insulti,
 C'hui a c'hoar ar politess
 Hag ar civilite.
 Lavarit d'in, hag er skolaj
 O peus desket an dra-ze ?
 = = = = = = = =
 - Allaz, me a vel ervat
 Ez oun gwali erruet
 O c'houlen e amitie
 Digant eur seurt boquet
 Eman a c'hoar al latin
 Ar grec hag ar galleg;
 Met piou a zesk d'ezann

Ar Pinvidig

Petra glaskez em c'henver
 Paour keaz infrounted ?
 Kerz buhan eus al leac'h-ze
 Pe me ve dishonored.
 Penaoz e vez ken ardiz
 Da zont d'en em avans
 Da gomz dirag eur bourc'hiz
 Na ~~pebez arroganz~~ !
 = = = = = =
 Penaoz ta den ignorant
 Ha te a gredfe diviz
 Ous an den manker savant
 Ha mab d'eur bourc'hiz
 Te ne c'houzout ober netra
 Nemet trouc'ha buzug
 Dribi yod ha patatez
 Ha ~~glapez evel eun Turc~~ !
 = = = = = = = =

ER skolaj me meus desket
 Kalz traou a gONSEKANZ
 Ha ne c'houzit birviken,
 (D'an dra-ze 'meus assuranz)
 Desket 'meus ar galleg,
 Ar grec hag al latin
 Hag ouspenn, war ar marc'had
 Em eus desket beza fin.
 = = = = = = = =
 Penaoz ta, azenn gorgnog
 E komzez evel se .
 He a c'hoar ar brezoneg
 Bemdez kerkoulz ha te
 Ha fae braz e ve ganen
 Gwelet eur seurt truilhen

(Ar Paour ha ar Pinvidic) (suite)

- 5- E skol an humilité
Ne meus desket hirvoudi.
Ho proposiou a zrouglans
Ne c'hellont ket va zroubli.
Ne a leze ar venjans
Gant an Tad éternel,
Fehini zo just e valans,
Eme ar Spered Santel.
- Oh, na pebeuz sermouner,
Ha pebez liezen !
Met, allaz, siouaz d'ezan
N'en deus ket a zoutanen;
M'en dije bet ar galloud
Da zont ' rei d'in pinijen
E ven bet exkumuniget hep mankout.
- 6- Allo, den chentil yaouank,
Ne meus ket desired
E vijez deuz an Iliz
Er meaz bannisset;
Rag n'eo ket henorabl
D'eur c'hristen badezet
Gwelet unan euz e vreudeur
Ken miserabl rentet.
- Penaoz e venn me breur d'it,
Koz mab ar baourentez,
Ha me savet e ti va zad
E kreiz ar binvidigez.
Eur vez eo sellet ouzit
Gant da zilhad roget;
Ne vez atao magnific
Kempennet ha brossed.
- 7- Eun azen, palennet kaér
Ne d'eo nemet eun azen,
Ha pa ve kurunen Cezar
Poset d'ezan war e benn.
Ha pa ve an holl dilhad kaér
Ganeoc'h war o krohenn,
N'oc'h estiman ket hirroc'h
Eget priz eur spilhenn.
- An dra-ze a gavan iskiz
Gwelet eun domistic
A zaofe gant an ourgouilh
Ken huel-ze e beanic.
Da blaz te a zo duont
Ebarz ar marchosi,
Pe o sikour ar merc'hed
Da torcha al listri.
- 8- Va flaz a zo dreist-holl
El lec'h me man va never
Da ober dre ar bed-man
Bolontez va c'hrouer.
Gant va micher, me, aotrou,
A vag ac'hanoc'hui;
Ha c'hoaz o peuz c'hoant grougnal. En da galoun c'hoantuz
Goude feneanti.
- Me am eus palesiou kaér
Ha forz acour haq arc'hant.
Peadra d'ober chair vad
Beteeg ma vin countant .
Ha te, den malheüruz
A rank chom da c'hlaouri;
Ne peuz nemet avi.
- 9- Komz a rit, O va bourc'hiz
Gant re a vanite.
Lab ar paour a zo ive
Mab an Aotrou Doue.
An danvez, 'barz ar bed-man,
Ne ra ket ar meritou ;
An traou-ze holl, va mignoun ker,
A zo vaniteou !
- Setu aman c'hoariou... !
Ma rank an aoutrouien
Dont da zerra o ginou
Dirak labourerien....!
Kat, en anzao a rankan,
Komz a ra gant furnez;
- Beteeg ma vin gant Jezuz
E palez an Envou .
- /
- Ar Paour: 10- E skol kalet ar boan
E kreiz an disméganz
Eo e teskiz, a gredan,
Eun tamm experianz .
Va fartaj, er bed-man,
A zo an ankenniou

- Deac'h 'vit ar vej kenta
 E kleviz ar goukou;
 Gant plijadur ha joa
 E chomiz à'her selaou. X
 Ha piou ne garfe ket
 Labousig kell an anv ?
 Mall e vez d'he c'hlevet
 En hor bro o kanan.

2- Setu hanter-Ebrel ,
 Deuet an nevez-amzer
 Hag an heol o sevel
 En eur mor a sklerder
 A laka ar bed holl
 D'en em rejouissa; X
 Ha peb tra, en eun taol,
 A glask divorfila.

3- Naq a vokedou an anv
 A zo euz ar c'hleusiou.
 Bugale a velan,
 Leun o daouarnigou
 Bokedou tro 'n heol
 A garg ar grizennou.
 Gwelet a ran dre holl
 Fleur a bep seurt liou.

4- Da vintin pa zavan
 Da zini an Angelus, X
 Gant bonheur e klevan
 Eur c'han melodius.
 A bep seurt laboused
 E koat Pou'l al Liou,
 Eun dudi o c'hleved
 O kemesk o mouesiou.

5- Hag an alc'houdig voan,
 Labousig ken karet
 Te péhini a glevan
 O tridal ken abred,
 Digor d'ha ziouaskell
 O sevel goustadic
 Etrezeg an Huel
 Ken brao, ken sederic !

- 6- Gloar d'an Aotrou Doue
 Bennoz ha meuleudi
 En o yez a grie
 Eun niver a vouilc'hi ,
 Ar boc'h ruz, ar pintic
 Hag ar c'houzoug-hir wenn
 A gane ken skiltruz
 O c'haera kanaouenn.

7- Pa za ar mcuss Laouïk
 Da ziwall e zened
 Pa vez e unanig
 Ec'h en em blij,o sellet
 Pegen skanv e savez
 Etrezeg an oab glaz,
 Pegen brao e kanez
 Da gantig leun a c'hraz.

8- E kichen bolz an env
 Dreist traonienn. an douar
 C'hoaz e kan da Zoue
 Eur c'hantig a c'hloar
 Rejouissa a reont
 Kalon al labourer,
 Pehini bleg aliez
 Dindan beac'h ar skuisder.

9- Kanit ta laboused
 C'houi 'zo laouen ha gae;
 Perag ne ran me ket
 Eveld'oc'hui ive
 Eun neubeudig a dra
 A ro d'eoc'h plijadur.
 Ha me garfe beza
 Ken eüruz ha ken fur !

10 - C pluv a zo ken flôur
 Ha livet ken skeduz !
 O nann,c'hui n'oc'h ket naour
 Pe 'n em gavit eüruz . /
 Me ... perag ar boan
 A bouez war va c'halon
 Perag en em gleman e va c'hondition ?

Met eur verc'hig prudent
 Leun a zoujanz done .

Eur galon haq a gar,
 A glask beza karet
 Poan en deus ha qlac'h har
 Pe'n em qav dilezet
 N'eo ket aour naq arc'hant
 Allaaz a glaskan me

X

- 1 - O Bielic Kerameal, eat out da leanez ;
 Ganez me vel o nijal va doussa levenez.
 Mouez an Aotrou Doue a zo deuet d'az kervel
 Ma santed e neus raktal ouz e ali santel.
- 2- Me ioa c'hoaz bihanic pa m'eus anavezet
 Gabrielic Loaëc, e skol ar seurezed
 Hi a ioa lent ha chenfil, ha eur botrezig koant;
 E ear a ioa graciuz, e douster ravissant.
- 3- Me 'm eus pedet eviti , euz a greiz va c'halon
 'Vit ma teuchje d'ezi eur gwir devosion;
 Pedet am eus ar Werc'hez da rei d'ezi grassou
 Ha da lakaat 'n he ene a hep seurt vertusiou.
- 4- Bet oun bet en he c'henver meur a vej o vidi;
 Ne zanten ket va skuisder , ouz he c'honsideri
 He c'houraj a ioa paduz hag he c'halon vaillant
 Ganthi me mijé great tro an departament.
- 5- D'ar poent-ze, me ioa yaouank, ardant, karantezuz
 Hag a grede, er bed man, e vichen eûruz,
 E mijé gellec beva e kenver Gabriell
 A ioa eur plac'hig modest, ken devot, ken santel.
- 6- Ar fizianz-ze a lakea va c'halon da dridal;
 Ha va spered a nije etrezec Kerameal
 Eno me wele Bellic, va mignounez
 Vel skouer ar vodesti, ar gened, ar furnez.
- 7- Siouaz ! va Gabrielic, n'her gwelin mui biken,
 E prajou Kerameal , ken kaër hag eur fleuren;
 Ne glevin mui he mouez o laret va hano:
 Gant glac'har e lavaran :"Adieu d'it-Kenavo !"
- 8- Gwerc'hez glorijs Vari, gri neb a gurunen
 D'ho daou bugelig bihan, da lakaat war o fenn
 Ha goude heur hor maro, deuit davet o ene,
 Ha zavint etreho tivrec'h, da Varadoz Doue .

Fanch Koz

1 -Refrain

Ia potred, me eo Fanch Koz
Hag a labour deiz ha noz
Met kaër am eus lopa
Ie jomm paour er memez tra.

2

Me zo mekanisian
Evit gwir, m'ar deus unan.
Dressa 'ran dournerezou
Kerkoulz hag ar manechou .

3

Va daouarn a zo kalet
Evel pa vent dirennet;
Hag an diwreac'h man zo krenv;
Stomog mad am eus ive.

4

Saïk Guivarc'h eo sur va den:
Gwall gamaraded om zoken.
Met pa vez bet banneou
E sao sikan avechou.

5

O Sant Alar beniget,
Patron ar varechaled,
Pedit Doue ma teuin da benn
D'ober eun tamm pinijenn.

6

Ha neuze me lavaro:
Dao, va morzol, dao atao;
Mar d'eo gwir en eus Fanch Koz
Eur plaz c'hoaz et Baradoz.

Boukedig tro'n heol.

1

O bokedig skeduz tro'n heol
 Ken anavezet gant an holl,
 Te eo a zigor da centa
 Gant da genvreur ar bouked-anv.

2

Te zo evel eur steredenn
 A lintra e kreiz ar glizenn
 Te a vousc'hoarz gant karante
 Da vugel an Aotrou Doue.

3

Da zeliou kaër a zo ruz-wenn,
 Da galon aour a zo melen,
 Melen evel ar boked lann,
 Hag ar bleunv a zac er balan.

4

Biskoaz Miz meurz, çant e varrou
 Ne reaz d'it meravel gant ar riou
 Ar vuhez ennot a zo kaled
 Vel e kalon ar Vretoned.

5

Lavar d'ar re am eus karet
 Divarnot e nij va spered .
 En da yez, lavar d'ezo sioulic
 O deus eur plac em c'halonic.

6

Ar garantez a vev ztao
 Rag trec'hed en deus ar maro.
 O ia, zur, en tu all d'ar beziou
 En em gar c'hoaz ar eneou.

FRANCINE INIZAN

I

Petra, Francine Inizan a nijet oc'h d'an neñv
Assamblez gant an elez da Baradoz Doue ?
Ar sonj he meuz ac'hanoc'h 'zo atao'em speret
A n'am kuitaño biken keit a ma viñ e bed.

II

Me eo ar c'hurust bihán a iliz Kernoues
O peuz klevet o kana gwechal ken allies.
O peuz gwelet daoulinet e hars an aoter ~~Fraz~~
O c'hassista ar beleg e mysteriou ar groaz.

III

Dalc'het e meus ar goulou vit o kommuhia
A lennet var o pisach eun ear euz an ~~pla~~
Eun ~~Par~~ a zevotion hag a humilite
A garantez teneruz e kenver hon Doue.

IV

Gwelet e meus ho daelou o koueza d'an douar
Hag evel perlezenou e verkent o glac'har ;
Daoust d'aze o mugellou a vousd'arze atao
O tremm a jomme labuenn en despet d'o poanniou.

V

Ar paour n'o gwelo mui pa zei da ~~dix~~ ho Tad
O rei d'ezan aluzenn gant eun ear dous a mad
Ne velo mui o pisach laouenn a gracius
Kemment se vo evitan eun nenvor ankenius.

VI

C'houi eo gloar ho parrez ~~gaz~~ hag henor Kergunic
Dre o puez exemplus hag ho feiz birvidic.
Ar gwez a gaveur tristoc'h endro d'ar maner goz
Seblantout ha reont d'in e ~~tougont~~ kaoñ deoc'h.

VII

An avel huanadus o c'houeza 'no brankou
A ra d'ezo hirvoudi a murmuri klemmou.
A dre ~~Idhag~~'ar natur' leveront kement mañ
"Peleac'h eman Francine hor mignounez vihan ?"

VIII

Allas ! Francine Inizan ne vezoo mui gwelet
En disheol ar gwez uhel eleac'h ma oa savet.
Ne m'a mui e Kernoues merc'h vihan de Kersauzon
Met e hanoozo skrivet ebarz meur a galon.

IX.

Allas pebtra er bed mañ a ~~chafach~~ ^{henc'h} e ber amzer
Ag ar bokedou kaera, peuria a veler
A greiz ma vent o lintra en holl skeud o gloar
Torret diwar o brankou, trouc'hed diwar o gar.

X

Met ar bokedou divin a sao e harz ar groaz
Arrozet gant goad Jezus, savet er poanniou braz.
Ar re ze a jomm skedus hed an eternite
En despet da lucifer a de holl droug elez.

XI

Pa zei ar c'hurust bihan etrezek ar mor braz
Ha pa vezo e hunan e c'huanado c'hoaz
~~Monat~~ a rei da bedi var bez e vigounez
Hag e skuilho warnezañ daelou a garantez.

LOUIS PAGE.

SON AR FALHERIEN

savet gand LOUIS PAGE

1 Va zelennig , chanchomp a don ,
lezomp hor gouelvan hag hor c'haonv

DISKAN : O , ya da , kanomp gand joa
ur ganaouenn d'ar falherien

2 Ar falher paour a zao mintin ,

abred ez a gand e ribin

3 Aliez kerkent diou ha teir eur

ema war zao ar c'hez falher

4 E bater neuze a lavar ,

ne vez ket hir , an holl her goar

5 Mond a ra en hent drant ha seder

rag ur paotr krenv eo ar falher

6 Gand e vorzol hag e anne ,

me a gred en-deus un tamm fouge

7 Va mean zo mad , va falc'h zo lemm

n'ema ket ar c'hal war he dreumm

8 Asa paotred , holl emaomp aman

piou vo hirio an diwezan

9 A-barz komans ar c'habitenn

a denn e dok , a ra ur bedenn

10 Goude e tap krog er mean lemma

an holl baotred a ra eveltan

11 Setu an holl filier o seni

asa , paotred , koulz eo kregi

12 Er foennog ne vez mui klevet

- med trouz ar filier o reded
- 13 Pa vez an deiz o houlaoui
ar falherien zo a-zrevi
- 14 Ur blijadur eo o gweled
pa vezont war gorf o roched
- 15 O falc'h a ra un hanter tro
ar foenn a strikont diouto
- 16 Ar strevou a zao evel kaeou
ar baotred zo ruz o fennou
- 17 Rag war ar gliz eo peurvua
e klaskont holl en em esa
- 18 An dour a red teid an elgez
mez chom a-drenv biken jamez
- 19 Hardi , paotred , chachomp atao
d'ar foennog vraz greomp e varo
- 20 Erru Marijann gand an dijuni
lez ar jaodell zo ganti
- 21 Al loaiou beuz a c'hoari mad
buau eo rinset ar bodezad
- 22 Goude ze e krogont adarre
mond a reont yud e-teid o stre(o)
- 23 Evel-se e tremen an dervez
e-kreiz al labour hag ar pres
- 24 Gourvez a ra ar c'hez falher
e gorf brevet gand ar skuisder
- .25 Ankounac'haad a ra e boan
o trebi kig ha farz d'e goan

- 14 Ur blijadur eo o gweled
pa vezont war gorf o roched
- 15 O falc'h a ra un hanter tro
ar foenn a strikont diouto
- 16 Ar strevou a zao evel kaeou
ar baotred zo ruz o fennou
- 17 Rag war ar gliz eo peurvuia
e klaskont holl en em esa
- 18 An dour a red teid an elgez
mez chom a-drenv biken jamez
- 19 Hardi , paotred , chachomp atao
d'ar foennog vraz greomp e varo
- 20 Erru Marijann gand an dijuni
lez ar jaodell zo ganti
- 21 Al loaiou beuz a c'hoari mad
buau eo rinset ar bodezad
- 22 Goude ze e krogont adarre
mond a reont yud e-teid o stre(o)
- 23 Evel-se e tremen an dervez
e-kreiz al labour hag ar pres
- 24 Gourvez a ra ar c'hez falher
e gorf brevet gand ar skuisder
- 25 Ankounac'haad a ra e boan
o trebi kig ha farz d'e goan
- 26 Euruz an den o labourad
p'en-deus feiz ha bolontez vad
- 27 Da Zoue e kinnig e boaniou